

SKS, AR C'HAMPIÑ KEVREDIGEZH

KAMPIÑ DIHARZ EN UR BEGAÑ E-BARZH



Len ar pennad-mañ
e brezhoneg pe e gallaoueg
war.cotesdarmor.fr/mag197

Krouet e oa bet Strollad Kamperien Skol-veur (SKS) e 1937 abalamour da implijidi an Deskadurezh-Stad d'anavezout plijadurioù ar vakañsiñ dindan an amzer, hag en Aodoù-an-Arvor e c'haller kavout tri framm ezel eus SKS. Bremañ int lec'hioù digor d'an holl hag a ginniger enne ur mod all da vakañsiñ ma vez pep hini o reiñ dorn gant plijadur.

Amañ ne gavfet na park dour, nag ostaleri, na renkennadoù mobil-homes stank-ha-stank. War uhelderioù traezhenn Tornamin emañ tachenn-gampiñ SKS Plerin, brudet evit bezañ lec'h ar c'hampiñ didro-kaer mod gwechall. En un ti-prenn bihan eo bet staliet burev an degemer, plas e-leizh zo war tor an torgennoù, ur bloc'h yec'hedel bet kempennet evit degemer an dud dalc'h et o c'herzhed, un daolenn ping-pong hag ar mor e penn an hent... N'eus ket ezhomm muioc'h evit bezañ eürus e-pad ar vakañsoù ! Sed ar pezh a soñj izili SKS bepred, ha 700 int en Aodoù-an-Arvor. Tremen a ra o c'houlzadoù vakañsiñ diouzh lusk an natur a zo tro-dro hag ar mareadoù plijus a vez tremenet asambles... hag ur munud talvoudus-kaer : pep hini a ra e lod a-youl-vat, d'o lec'h vakañsiñ da dreñ evel zo dleet.

UR MEKANIK PLEUSTRET MAT

An emverañ : diazez SKS eo. Pep hini eus an 88 tachenn-gampiñ ezel, evel Plerin, Sant-Kast-ar-Gwildoù ha Pleuveur-Bodoù, ac'h a en-dro dre ar reolad kenlabour dibar-se. « *N'hon eus ket implijidi, eme Olivier Cojean, karget eus SKS en Aodoù-an-Arvor. Pep lec'hienn a vez evezhiet gant un dileuriad war an dachenn, karget eus al labour prientiñ a-raok ma errufe an douristed, ha fiziañ a ra ar merañ enne da c'houde.* » En Aodoù-an-Arvor eo Catherine Le Bars, Alain Chartier ha Sylvain Caulier a ra kemend-all. « *Hon roll, eme Sylvain, eo gouzout petra eo an ezhommoù, kenurzhiañ al labourioù a rank bezañ graet, gwiriekat e vez doujet an normoù hag aozañ ar mod da gempenn an dachenn. Ha pa vez poent digeriñ e roomp an alc'hwezioù d'arc'hampere en em gav da gentañ.* »

Mont a ra en-dro hervez ur mekanik pleustret mat : « *An hini kentañ erruet zo karget e-pad un tamm amzer d'ober war-dro an degemer ha mont en-dro an dachenn-gampiñ, eme Alain Chartier, ezel eus kuzul-merañ ha dileuriad tachenn e Sant-Kast-ar-Gwildoù. Ur wech ma vez travalc'h a dud e vez aozet « bodadeg argamperien » hag ingalet arc'hargoù etre an dud.* »



En eskemm da 29 euro bep bloaz evit un den deuet ha 5 euro evit ur bugel, hag un tamm amzer, e c'hall izili SKS kaout prizioù ha lec'hioù vakañsiñ emsav, evel amañ e tachenn-gampiñ Sant-Kast-ar-Gwildoù.

« KENSKOAZELL HA KEHEÑTIÑ FORZH PEGEMENT »

E-giz-se, bep sizhun a-feur ma erru pe ma' c'h a kamperien kuit, e vez tud a-youl vat bepred evit ober war-dro ur garg talvoudus : merañ an dachenn-gampiñ war ar pemdez, degemer paeamant ar chomadennoù, teñzorerezh, surentez, aozañ abadennoù buheziñ evit ar re yaouankañ... Ouzhpenn-se en em ouestl pep kamper ha kamperez da gemer perzh e « *servijan deiz* », da lavaret eo bezañ diouzh tro en degemer ha naetaat ar privezioù hag al lec'hioù foran asambles gant ar re all da skouer.

An doare-se da vont en-dro ne vez ket gwelet alies ha krouiñ a ra un aergelc'h dibar. « *Kenskoazelle-leizh a vez ha komz a reeraes-tre etrezomp en dachenn-gampiñ, eme Olivier Cojean. Klevet a reomp alioù fur digant ar re all, ober a reomp war-dro an eil egile. Da skouer e c'hallomp leuskel ar vugale da vont anez bezañ war o lerc'h bepred peogwir e vez un den war evezh dalc'hmat.* » « *SKS zo un tamm evel ur familh, darempredoù gwira vez skoulmet,* » eme Alain Chartier

hag a wel muioc'h-mui a dud yaouank, familhoù dreist-holl, o vont e tachennoù-kampiñ ar rouedad abalamour ma kavout « *emsav hon frizioù ha talvoudus ar spered a valedezh e SKS* ». An aozadur-se a c'hallfet ober anaoudegezh gantañ d'ar Sadorn 4 a viz Mae 2024, eus 10e beure da 5e goude kreisteiz, da-geñver an dorioù digor en teir zachenn-gampiñ SKS en Aodoù-an-Arvor ●

GOUZOUT HIROC'H WAR
www.gcu.asso.fr

Virginie Le Pape